

DAIT'TA MA MIGNONED

Diskan :

Dait'ta buan ma mignoned !

Dait da redek

Dait'ta buan ma mignoned d'ar Redadeg

Dait'ta buan ma mignoned !

Dait da redek

Kanomp a-bouez penn evit ar Redadeg

1- Krog a ray ar Redadeg a-barzh e Karaez
Tapit ho potoù ha dait genomp da Greiz-Breizh

Diskan

2 - A-stroll, a-gevred evit ar brezhoneg
Bout 'vo plijadur ...ha c'hoarzhadeg

Diskan

3 - Kouviit Mignoned, komper ha kamaraded
Grait bourrapl genomp-ni hag an holl Vretoned

Diskan

4 - Tapit dorn ho mamm, ho eontr hag ho c'hoarezed
Redit e brezhoneg get an dud a garit

Diskan

5 - Get ho pelo, get ho skate ha get ho marc'h-tan
Ma n'oc'h ket-c'hwi daet c'hoazh... dait da Wengamp !

Diskan x 2

